



EXEMPL HA PUNITION

*Eus a eur Plac'h Yaouanc, pehini e
deus bet ar grueldet da laza e févar
C'hrouadur, condaonet da veza
crouguet ha dévet er guér a Roazon.*



Var eun ton nevez.



SPERET-SANTEL, m'ho ped da rêi din al lumier,
Ar c'hraç da gomposi eur Verz spirituel,
Eun exempl a zo güel drist hac eur melezeour
patant,
Ma rêi reflexion varni an dud yaouanc.



Er blavez mil seiz cant ha tri a daou-uguent,
An deivet a vis du, evit rêi da entent,
En escopti a Roazon, en dreo eus a Zant-Gloda,
Ec'h êruas eur malheur a ra d'an oll crena.

—

Eur femelen yaouanc, a lignez enorabl,
Eus an dud pinvidic abers mam, abers tad,
A hanas daou vuguel ; er moment e voe tentet
D'o etrangli o daou, hep beza badezet.

—

O c'heuil eur guzul fall e qemeraz eur bal,
E yas da gorn ar parq d'o flanta en douar ;
Mes Doue oll-buissant en devez bet permetet
Dre eun aneval brutal m'ê ar c'hrim anavet.

—

Retorn a ras d'ar guêr da guz he fallenti ;
He zad he remercas hac a c'houlas outi :
Va merc'h, pelec'h oc'h-u bet? goal chenchet
bras ho cavàn :
Diouz al liou a zouguit e seblant ez oc'h clàn.

—

Respont a ras d'e zad gant eun êr indifferant :
Me a vezo exempl da galz a dud yaouanc ;
Va buez a verito beza partout publiet,
Ma rêi reflexion varni calz a blac'het.

—

He zad ouz a c'hlêvet a ras reflexion
Var he oll broposiou a douche e galon.
Ha possubl ve ta, va merc'h, et ven bet ouz
ho mezur,
Em be eur c'hrouadur da rêi din displijadur !

Da ben pêvar devez m'e doa grêt he zorfet,
He zad a yas d'ar parc da guerc'hat e loened ;
P'antreas voe estonet o velet eun aneval
E tenna'n daou vuguel ermès eus an douar.

Euz a zeiz crouadur e deuz bet va fried,
Ne meus nemet unan oun ganti glac'haret.
Eavaret mat e voa din em bije sur calonat
Diouz va merc'h libertin, abret pe divezat.

Redec a ras d'ar guêr n'eur goler ar vrassa,
Ma gemeras eun hach en avis he laza ;
Mes pa zonjas sqêi ganti, e æl mat e inspiras
D'arrêti e goler, hac e verc'h a dec'has.

Qüittât a ras an ty da vit e daou buguel,
Hac o facas o daou ebars he davancher,
Hac en em rentas gante et ty'n autrou Senechal,
Da zisclêria deàn he zorfejou barbar.

An autrou p'e c'hlêvas a voe bras estonet ,
A chomas ouz e dol evel eun den mantret ;
Ar bluen demeus e zorn a goeas crac diganta ;
Pa vel an daou vuguel e commanç da vouela.

Penos, miserables ! ec'h eus bet ar galon
Da laza daou vuguel hep caout compassion?
Eur bunion güell vras ac'h eus-te sur meritet,
Hac a vo hep dale oc'h enep prononcet.

An autrou Senechal a gomand d'eur serjant
He laqat er prison neuze souden vatant ,
Ergüerdemeusa Roazon ha dindanseitec devez
E voe grêt he arrêt ha jujet he froces.

Pa voe interrojet, ar justiç a estone
O clêvet ar plac'h-mâ e tislêria he bue ,
O velet peguer secret e cuze he oll c'hrimou ;
Nemet puissanç Doue n'anavee anezo.

Eus a beïmp crouadur a meus laqet er bed ,
Nemet unan zo beo ; pêvar a meus lazet :
D'en sur n'en devezus santet va oll c'hrimou
execrabl ,
Nemet sur an daou-mâ en deus gouezed va zad.

Ar c'henta' meus ganet e qichen qêr Vitre,
A dolis er rivier pa voe ganet gane ;
Hac an eil a voa maro aben ma teuas er bed,
A blantis er bern teil en parc va amezec.

Ha nemet an drede zo chomet en bue ;
Entre Kermaria e voe ganet gane ,
Erc'hassis prest d'ar porchet, hac eno e voe cavet
Gant daou zen ancien o tremen ar vêtet.

Neuze' voe condaonet da vea divisqet ,
Laqet en he c'herc'hen eun invis roussinet ,
Hac an amand enorabl a rancas ive da ober
Gant eun torch allumet dirac ilis Sant Pêr.

A dal ilis Sant Pêr bete ma voe rentet
En qichen ar potanç, true voa e c'hlêvet
O ouela, o teplori, o c'houlen digant Doue
Eus a greiz he c'halon barados d'e ene.

Cri vije ar galon en Roazon na ouelje ,
O clêvet ar plac'h-màn penos e prezegue ;
Ha pabignas d'ar potanç e c'houlennas an amzer
Da instrui'r yaouanqis he assistet da vervel.



REFLEXION.



ENTREZOC'H, tud yaouanc, qement zo o
clêvet,

Comprenit ar maro zo din-me preparet ;

Évit va oll bue fall ha va dizoboissanç

E rançàn mervel mezus, sivoas, ouz eur
potanç !



Me zo eur plac'h certain a voa elevet mat,
Disqet e pep fêçon gant va mam ha va zad ;
Demeus a zeiz crouadur int am c'harie ar
muia,

Me ra bremàn deze var o zreid dizec'ha.



O ren va unec vloas e voen-me recevet
Gant persõn va farres, gant enor ha respet ;
Da ober va c'homunion etouez ar vugale ;
Pemp bloas e meus bevet en carante Doue.



Da ben va c'hoezec vloas e voen bet debochet
Gant diou blac'h libertin hac o c'hamaradet,
Ma yèn-me gante bemnos ha d'ar bal ha d'an
dançou :

Va mallos a bedàn gant an nep o heuillo.

Tadou, ha c'houi, mamou, mestrou ha
mestrezet,
Instruit ho pugale hac ho tometiqet ;
N'o lezit qet da vonet da nep seurt assamble
Na vezo tud honest en compagnunez gante.

Me zo hirio, sivoas, melezour digor franc,
Diouallit diouz ar bed, entrezoc'h, plac'het
yaouanc ;
Pedit Doued'ho sicourhace vañs sacrar Verc'hez
Da bellât diouzoc'h ar goal gompagnunez.

En em recommandi a ràn d'ho pedennou ;
Pedit Jesus dre e c'hraç d'am receo er joayou ;
Mont a rancàn d'ar maro, pa e meus er meritet.
Pardon a c'houlennàn ouz qement zo o clêvet.

Qüittât ràn ar hed-màn leun a dristidiguez :
Va Jesus adorabl, ho pet ouzin truez !
Mervel rìn ouz eur potañç, ha va c'horf paour
vo dêvet !
Al ludu aneàn gant an avel strinqet.

Comprenit va bue entrezoc'h, bugale :
Oboissit d'ho tud, balamour da Zoue ,
Hac e vezot sur eun deiz oll da vea curunet
Gant Jesus en e c'hloar en pales an Drindet.

FIN.



00187

E Montroulez, e ty LÉDAN, ru ar Pave.